



HISTOAR ADMIRABL
A VUEZ
SANTEZ HELENA.

Var ton YAN GUERIN.

G. G. R. M.

BREMA e fel din disclêria
Ar Vuez Santez Helena :
Bezit attantif de c'hlêvet ,
Ho calon sur a vò touhet.

Clêvet a refot he buez
Carget eus a drisudigez ,
Hac ar martir he deveus bet ,
Hac a zo ganti c'hoarvezet.

Me lavaro deoc'h pen-da-ben
E voa hi caera femelen
A gement a ouijet da gavet ;

Gant ar bed oll voa enoret.

Beza voa a vrassa qalite,
 Pa voa hi merc'h da eur Roue;
 Rac merc'h voa d'ar Roue Anton,
 E Constantinopl voa e dron.

Pa voa Pab e Rom Sant Clement
 Ennes a voa eus e c'herent,
 E voe bars er bed-mâ ganet
 Er blavez pêvar c'hant ha deg.

Goude an Incarnacion
 A Jesus, hon Roue guirion,
 Er gêr eus a Constantinopl,
 Hac estimet bras gant ar bobl.

Pa voa en oad a bemzec vloas,
 He mam diganti a varvas;
 Ma fellas d'e zad he havet
 Evit ma vize e bried.

Mont a eure da gaout ar pab,
 Hac en esper caouet e c'hrat,
 Evit caout e gonsantamant
 Da zemezi d'e verc'h yaouanq.

Ar pab neuze pa er c'hlêvas,
 A meurbet en em estonas:

Ne gaffet christen var ar bed
A gemerfe e verc'h da bried.

Gant an Ilis eo difennet,
Ha gant Doue eo ordrenet.
Ne vezoz James eureujet
An tad nac ar verc'h népret.

E ve demezet ar verc'h d'an tad,
Hennes zo eur c'hrim execrabil,
Eur c'hrim a enep al lezen,
Siouaz ! etouez ar gristenien.

P'e devoa clêvet Helena
E c'haruje sur qement-mâ,
Var ar môr en em ambarqas,
Hac en Flandres en em rentas.

Eno pa voa hi êruet,
En eun eclus en em rentet,
Pa voa a dost d'eun abati,
E comanças son ar c'hlec'hi.

Neuze an oll leanezet,
A voue sur quer bras estonet
O clêvet o c'hleyer o son,
Hac int mont oll en orézon.

Hac int mont ha sellet neuz ;

Piou a voa êru er c'hontre,
 Ma remerqjont eur femelen
 A zeuc d'o c'haout pen-da-ben.

Mont a rejont e procession,
 Gant respet ha devucion,
 Evit monet d'e rancontri,
 Gant eur joa vras d'e zaludi.

Ha pa velas hi aneze,
 E voe estonet bras ive,
 Hac ous o guelet a vanden
 O tont d'e rancontr evelen.

Neuze e recevjont anezi,
 Ha cunduet d'an abati,
 Rac guelet a rent oll certen
 E carre an Otrou souveren.

Me ne chomas qet pell gante
 Ne chanchas timat a gontre;
 Ha rac ar roue Gatebron,
 Eun den cruel ha dirêzon.

Mont a eure var bord ar môr
 Evit sovetei he enor,
 Ha ma pedas merdai di,
 Mar plîch ganeoc'h va ambaroi.

Eun dra derrubl a êruas
 Pa voant e creis ar môr glas,
 Rac an dud oll o voa lazet
 Gant ar c'horserien arajet.

Exceptet Santez Helena,
 A voa eur femeien ar gaera,
 O sonjal caout e guerc'hdet,
 E voa hi gante rezervet.

En orêzon en em laqas,
 Da Jesus en em recomandas :
 M'o ped, va Jesus, va Roue,
 Conservit va virjinite.

Pa voa achuet he feden
 D'or Zalver Jesus evelen,
 Eun tân eus an ên a gouezas,
 Al lestr hac an dud a losqas.

Hi voa prezervet gauscoude
 Gant eur planqen eus he bue,
 Ec'h êruas er rivier Sign,
 E qichennic bord eur jardin.

Ar rivier yê bete Londres,
 Hac eno e voa eur verjes,
 Hac eur feunteun gaér a gayas,

En e c'hichen e tisquizas.

Ar roue Heri e guelas
Ebarts en eun dristidigez vrás,
Azezet e c'hrs ar feunteñ,
Ha ne voa den en e c'hichen.

Tostât a ras neuze outi,
Hac e c'houlennas diganti;
Lavarit dñ prezantamant
A belec'h oc'h, merc'hiq yaouanq.

Me zo eus a Constantinobl
A gerent pinvidic ha nobl,
Hac o zo amàn achapet
A dre daouarn ar barbaret.

Allas! va c'halon a fazi dñ,
Rac naon emeus, ne allàn mui;
Pell bras zo ne meus debret tam,
Ha va c'halon em c'hereis a rann.

Ar roue Heri pa e c'hlêvas,
D'e omonier a gomandas.
Monet pront da gerc'hat dezi
Peadra evit he zoulaji.

Neuze en e c'hassas gantâ
Ebarts en e di da loja,

Hac o tont d'e recomandi
Evel unan a dud an ti.

Gouide-ze e voant demezet,
Souden e voe grêt an euret,
Hac ar fest a badas gante
Bete an nombr a ugent de.

Daou vloas antier ez int bet
En o flijadur assuret,
Qen a zeuas da veza brazez,
Neuze e devoa goal vuez.

Digant e vam ar rouanez
E devoe calz a baourente,
Hervez ma rapport an histoar,
E devoe calz eus a c'hlac'hар.

Ar roue Heri a yas timat
Da gaout an tad santed ar pab,
Evel ma en devoa recomandet
D'ar gombat ouz ar sarazinet.

Lezel a ras sur e secret
Tui merq er gêr eus e gachet
Rei a ras unan da Helena,
Un all da Vari Clocestra.

An drede ives a roas

hont a voa e vignon bras,
I tehini e recommandas
I bried gant affeccion vrás.

Glac'har vrás a voe er pales,
O lavaret adieu assambles,
Hac epad eiz vloas varnugent
N'en em velimp sur e nep hent.

Helena e devoa ganet
Daou vugel a voa caër meurbet;
He mam-gaër a roas da gredi
Penos e devoa bet daou gi.

Ar roue Heri pa glêvas,
A voe assur estonet bras,
O clêvet e devoa ganet
Daou gi evelse e bried.

Neuze e voe hi condaonet
Da gaout e brec'h deo troc'het,
Hac amaret he bugale
Unan dezi a bep coste.

Ambarget voe var ar môr bras,
Ebars e Breiz e tisqennas :
Ar baïq en devoa hi digasset,
Da Londres a zo retourner.

Cri vije ar galon na voelje,
 Oc'h e guelet nep a vije,
 O rei he divron d'he bugale
 Hac hi prest da verval digante.

Da gousqet neuze en em laqas
 Daou leon eus ar forest a zeuas ,
 A gassas gante an daou vugel,
 Qement-mâ certen voa ciuel.

Eun ermit voa neuze er c'hoat,
 Ha dious ar c'hii a zeuas timat ,
 Hac a gavas an daou vugel
 Eire griffou daou leon cruel.

Unan al leon a hanvas ,
 Egile ar vrec'h a c'halvas :
 O daou e voant gantâ maget
 Epad c'hoezeg vloas assuret.

Ebars epad an amzer-mâ ,
 E voe e Naonet Helena ,
 Hac eun hostizez a gavas ,
 Truez outi a gemeras.

Chom a eure da zervicha ,
 Ebars en ty voa an distera ;
 Disprizet voa gant pep hini ,

Laqêt voa da dorchâ listri.

Ober a rê gant dilijanç,
Hep na rebel na repugnanc,
Qement a ordrenet dezi,
En o grê oll hep contraigni.

Guelit amâ greg eur roue
Carget demeus a baourente,
Rentet qen humbl ha qen izel
Dirac ar bed universel.

Sellit bremâ an humilite,
Honnes a blich bras da Zoue,
Rac an humbl a zo exaltet,
Hac ar superb zo discaret.

Ar roue Heri distro a Rom,
Ha gantâ ar roue Anton,
A êruas en e bales,
Ebars er gêr eus a Londres.

Allas ! eno pâ êruas,
Ar c'homt Clocester a gavas,
Ha goulen neuze digantâ
Peleac'h voa êt Helena.

Nao messajer voe digâsset
Dirac ar roue da lavaret

O devoa digasset peb a lizer
D'ar c'hont Clocester a dra sclær.

Mes eun all a zeuas goude,
A lavaras ar virione,
Penos e voa bet trahisset
Gant ar rouanez cos assuret.

Ar rouanez cos zo condaonet
Da veza en beo losqet,
Abalamour ma e devoa
Laqet trêc'hi brec'h Helena :

Me lavarо deoc'h ar recit
An daou vugel hac an ermit,
Ha penos voa an disparti
Ebats er c'hoad gant cals a gri.

Felix a yas var bord ar rivier
Da bournen gant e zaou vugel :
Amàn, emezàn, o qivis,
Ganén d'am zy o tigassis.

An daou vugel a respondas
D'an ermit outo pa gomzas :
N'en dê qet c'houi-ta, ermit-mat,
Eo a zo a dra zur hon tad ?

An ermit neuze a lavaras

Deze gant tristidigez vras :
 Alias ! m'ho cavas amàn lêzet
 Gant ar bleizi ha leonet.

Ha gant truez m'ho tigassas
 Ho taou ganén d'am ermitach,
 Hac emeus ive ho maget ,
 Hoc'h elevet hac instruet.

An daou vugel a lavare
 An eil d'egile aneze :
 Pa n'en dê an ermit hon tad ,
 Deomp-ni bremâ da glasq hor mad.

An ermit a voe triste meurbet ,
 Pa o c'hlêvas o lavaret
 Ec'hajent, allas ! da glasq o mat ,
 Pa ne voe an ermit o zad.

Pa voant o tiscours evelse ,
 Èruout merdaidi ene :
 Bremâ ez eus c'hoezec vloaz
 E leqejomp amâ Helena.

Gant angen vras digonsolet
 D'e daou vugel e doa collet ,
 N'e devoa brec'h nemet unan
 Da zicour daou vugel bian.

Neuze e lavaras Martin :
 Brice, va breur, deomp bete'r fin,
 Elêc'h ma plijo gant Doue hor c'has.
 Ma cavimp hor mam.eur vech c'hoas.

Merdaidi, ni ho supli,
 Plijet ganeoc'h hon ambarqi,
 Ma zaimp, en hano Doue,
 Da glasq hor bro hac hor c'hontre.

Ar merdaïdi a respondas
 D'an daou vugel pa o c'hlêvas :
 Deut en hon lestr hac ambarget,
 N'i ho laqaï en douar assuret.

En Allemagn ec'h arrujont ;
 Hac arc'hant dezo a rojont ;
 Ouspen e rojont da leina
 D'an daou vugel gant calz a joa.

En Baviere pa voant arru,
 E zejont o daou a ru da ru,
 Ma o guelas ar rouanez
 Ebars er ru eus e falez.

Ma commandas d'he messager
 Mont da gerc'hat an daou vugel ;
 Rac aer caér oant evet an de.

Glorianda o admire.

Digasset voant neuze dirazi,
Roet voa deze da zebri :
Neuze evel tud affamet,
Ne squizent o tebri ho boüed.

Re-hir ven ma conten antier
Ar brezel voa er bro Bavier;
Mes beza voant victorius
An daou vugel dre c'hraç Jesus.

Martin a voa eun den vaillant,
Hac ebais er gombat sanglant
Laza a ras calz a zarazinet,
Ha calz eus an turqianet.

An Itron Varia Boulogne
O zicouras en deiz-se,
Hac evit caout ar victoar
Dre c'hraç Jesus var an douar.

Da Dour e teujont ac'hane,
Eur gêr a zo en Tourene,
Sant Martin a voa omonier
Da rei soulach d'ar beorien qer.

O mam ive a êruas
En Tour gant eur baourente vras,

Pa voa Martin o tistribui
An aluzen da bep hini.

Goulen a eure diouti,
Pa deuas da zellet outi,
A belec'h och-u deut amâ ?
C'houi n'en doc'h qet eus ar vro-mâ.

Comanç a ras neuze e galon
Da zonet d'e biqat qen don,
Neuze e teuas sonch dezâ
Ebars en e vam Helena.

Diagent en devoa clêvet
Evel ma on eus rapportet,
E pa troc'het eur e g'h dezi,
Hac én dont da zonjal enni.

Neuze en em anavejont,
Gant joa vrás en em zaludjont,
Otrou Jesus, eme Helena,
Va bugale gès a velàñ.

Ne zeziren qen evit mervel,
Nemet guelet va daou vugel :
Otrou Jesus, Roue d'an Trôn,
Homàn zo consolacion
D'ar eur vam e devoa collet,

He daou bugel e deus cavet.

Adieu, emezi, va bugale,
 Mont a ràn bremàn en nan Dove
 Hô pet ac'hanòn sonch ha memoa
 Va bugale ger, var an douar.

M'em bezo sonch ac'hanoc'h ivi
 Pa vîn e rouantelez an ên,
 Evit ma vezimp oll assambles
 Er barados gant an ælez.

FIN.

E Montroulez, e ti LEDAN, e